

KIS-600 – Gl. gravitation, gravité, pesanteur

(GE da MME – 30 10 98)

Setu ur roll termenoù o tennañ d'ar c'herc'hellerezh. Evit lod anezho, sl. KIS-188, La-07, pp. 76 hh.

Br. *amestez* g. Bannhent un amgerc'hell. Gl. *orbite*.

Br. *amestezañ*. Desezañ un amgerc'hell war he amestez. Gl. *placer, mettre sur orbite, orbiter*.

Br. *amgerc'hell* b. Korf o kelc'htreiñ en-dro d'unan all dre wered ar c'herc'hellerezh. Gl. *satellite*.

Br. *amgerc'hell galvezadel*. Loc'hell bannet eus an Douar hag o kelc'htreiñ en-dro dezhañ ; hv. *loarenn, adplanedenn*. Gl. *satellite artificiel*.

Br. *amgerc'hell naturel*. Astr o kelc'htreiñ en-dro d'unan all. Gl. *satellite naturel*.

Br. *amgerc'hellaat*. Lakaat ul loc'hell da amgerc'hellañ ; hv. *amestezañ*. Gl. *satelliser*.

Br. *amgerc'hellañ (ouzh, en-dro da)*. A-zivout un amgerc'hell, treiñ war he amestez. Gl. *graviter*.

Br. *amgerc'hellek* aa. Gantañ perzh un amgerc'hell. Gl. *satellisé, satellitaire*.

Br. *amgerc'hellel* aa. A-zivout an amgerc'helloù. Gl. *satellitaire*.

Br. *ankerc'hell*¹ aa. A zo mannelaet gwered ar c'herc'hellder warnañ ; hv. *anponner*. Gl. *en agravité*.

Br. *ankerc'hell*¹ g., *ankerc'hellder*¹ g. Stad ur c'horf ankerc'hell ; hv. *anponnerder*. Gl. *agravité*.

Br. *anponner* aa. A zo mannelaet gwered ar ponnerder warnañ. Gl. *en apesanteur*.

Br. *anponnerder* g. Stad ur c'horf anponner. Gl. *apesanteur*.

¹ Ankewer eo an termenoù-mañ, evel an termenoù gallek kevatal : ur c'horf alvezel a chom ur *gerc'hell* ha pa ve an nerzh digreizañ o vannelaat gwered ar c'herc'hellerezh warnañ. An termenoù kewer nemeto eo Br. *anponner, anponnerded*, Gl. *(en) apesanteur*.

Br. *diamgerc'hellaat*. Ober d'un amgerc'hell kuitaat he amestez ; hv. *diamestezañ*.
Gl. *désatelliser*.

Br. *diskerc'hellet*¹ aa(o), *diskerc'hell*¹ aa. A-zivout ur c'horf a zo mannelaet gwered ar c'herc'hellder warnañ dre an diskerc'hellañ.

Br. *diskerc'hell*¹ g., *diskerc'hellder*¹ g. Stad ur c'horf diskerc'hell.

Br. *diskerc'hellañ*¹. Araezusted o defe danvezioù goulakadel 'zo d'ober skramm ouzh ar c'herc'hellerezh. Gl. *action antigravifique*.

Br. *diskerc'hellat*¹ aa., *diskerc'heller*¹ aa. Gant ar gwered diskerc'hellañ. Gl. *antigravifique*.

Br. *enkerc'hell* b. Loc'hell oc'h enkerc'hellañ, dre se o tistreiñ war c'horre an Douar.

Br. *enkerc'hellañ*. Dilec'hiañ ul loc'hell bannet gant ur c'hwimm re vihan d'he amestezañ.

Br. *ezkerc'hell* b. Loc'hell oc'h ezkerc'hellañ, dre se o tiankañ en ec'hegor.

Br. *ezkerc'hellañ*. Dilec'hiañ ul loc'hell bannet gant ur c'hwimm re vras d'he amestezañ.

Br. *gingerc'hellat* aa. A-zivout un nerzh o werediñ a-c'hindu da hini ar c'herc'hellerezh. Gl. *antigravitaire*.

Br. *gourzhkerc'hellerezh*¹ g. Anadenn c'houlakadel a ve bezañ un nerzh kemparzhek a-c'hindu d'ar c'herc'hellerezh. Gl. *antigravitation*.

Br. *hollgerc'hellerezh* g. *hollgerc'hellañ*. Anadenn a zezgerias Newton he saveleñ : etre ar c'horfoù alvezel e wered un nerzh kendedennañ a zo e greñvder kevreizh d'o zolz ha da c'hinad karrez o fellder. Gl. *gravitation universelle*.

Br. *iskerc'hellder* g. Stad ur c'horf loet en ur c'herc'hellvaez bihanoc'h eget hini an Douar. Gl. *subgravité*.

Br. *kerc'hell* b. Termen hollek, nep korf en araez da gerc'hellañ. Gl. *corps gravitant*.

Br. *kerc'helladel* aa. A-zivout ar c'herc'hellerezh. Gl. *gravitationnel*.

Br. *kerc'hellañ*¹. Termen hollek, loc'hañ dre wered ar c'herc'hellerezh. Gl. *gravitation*.

¹ Termenoù meneget amañ dre un damant a yezhouriezh hag evit bezañ klok, rak daveiñ a reont da c'houlakadennoù n'int ket bet dervet.

Br. *kerc'hellat* aa. O kerc'hellañ.

Br. *kerc'hellder* g. Nerzh kendedennañ alvezel. Gl. *gravité*.

Br. *kerc'hellek* aa. Gantañ perzh ur gerc'hell.

Br. *kerc'hellel* aa. A-zivout ar c'herc'helloù.

Br. *kerc'hellerezh* g., *kerc'hellañ*. Anadenn ar c'hendedennerezh etre ar c'horfoù alvezel. Gl. *gravitation*.

Br. *kerc'hellgant* g. Egorenn ma emañ trec'h nerzh dedennañ un astr da hini an astroù amezek. Gl. *gravisphère*.

Br. *kerc'hellvaez* g. Egorenn ma wered ar c'herc'hellerezh. Gl. *champ de gravitation*.

Br. *kerc'hellwariañ*. Kemmañ tizh ul loc'hell dre gorvoiñ dedennerezh un astr. Gl. *gravidéviation*.

Br. *ponnerder* g. Pengennerzh ar c'herc'hellder hag an nerzh digreizañ. Gl. *pesanteur*.

Br. *ponnerventer*² g. Benveg da vuzuliañ ar ponnerder. Gl. *gravimètre*.

Br. *ponnerventerezh*² g., *ponnerventañ*². Muzulierezh ar ponnerder. Gl. *gravimétrie*.

¹ Da ziwall ez eus a zegemer e brezhoneg ar forc'hellegezh a gaver etre Gl. *gravité* ("nerzh kendedennañ alvezel", Br. *kerc'hellder*), Gl. *gravitation* ("kendedennerezh ar c'horfoù alvezel", Br. *kerc'hellerezh*, *kerc'hellañ*) diouzh un tu ha diouzh an tu all Gl. *graviter* ("kelc'htreiñ en-dro d'ur poent dedennañ", Br. *amgerc'hellañ*). Gant gerioù all e ve faziak kemer *kerc'hellañ* hag *amgerc'hellañ* evel kensterioù.

² Ankewer e ve reiñ Br. *kerc'hellventer*, *kerc'hellventerezh*, *kerc'hellventañ* da gevatal da Gl. *gravimètre*, *gravimétrie* pa'z eus kel gant ar re-mañ a vuzuliañ, nann ar c'herc'hellder, met ar ponnerder, eleze pengennerzh ar c'herc'hellder hag an nerzh kreiztec'h.